

(345, suite)

## Intaon al Lochen.

Var ton : De tous les riches d'aujourd'hui.

(346) Er bed-mâ, nac aour, nac arc'hant  
 N'o deus biscoas staguet va c'halon ;  
 N'ouy nemet ur c'hës paysant,  
 Eurus e voay en c'hondition.  
 Mes va fried carantèzus  
 Hirio a gollân... Pebes angen !  
 Guelit ha n'houn qet malheurus,  
 C'hoec'h crouadur a meus en lochen ! (bis)

D'ar mintin, pa zan d'am parcous  
 Adare da goumanç va deves,  
 E lezan va bugaligou  
 Eus va zi da quemeret eves ;  
 Ha d'am nôs, pa deuan en dro,  
 Evit va distrei deus va angen,  
 En em stardont oll var va gro,  
 D'am c'honsoli ebars en lochen. (bis)

D'ar c'houlz ma voa beo va fried,  
 E furmes a charme va c'halon,  
 Va bugale ourz va c'haret,  
 A rge din consolation.  
 Bep eil oll e proqen deze,  
 Un tad eurusoc'h na vo biqen.  
 Dre o jestou ~~ten~~ bernde  
 E voay eurus ebars en lochen. (bis)

Oh ! ma elfen, hep caout mizer,  
 Sevel ha disqi va bugale !  
 Me a elfe, gant an amzer,  
 Fortunia va merc'het marteze.  
 Neuze va fotriet a vo bras  
 (348) Capabl da labourat un dachen,  
 En c'hosni me a ello c'hoas  
 Bera eurus ebars en lochen. (bis)

(347) Bras voa va laouenediquerz  
 Pa vijen er quër gant va ziat ;  
 Bremâ, pa velân va merc'h qes,  
 An dour a deu var va decoulagad.  
 Seblantout a ra din hepret  
 Guelit e mam dener en c'hichen ;  
 En dispit d'am c'heus diremed  
 Aun c'hoas eurus ebars en lochen. (bis)

Eurusoc'h c'hoas m'en em gavo,  
 P'o guelin o c'hounid o bara ;  
 Neuze pa deuo ar maro  
 Eus ar vuez-mâ d'am delivra,  
 Va mignonet am enterro  
 Gant va fried pe en e c'hichen,  
 Ha va bugale a ranno  
 Va zam tiegues ha va lochen. (bis).

fin

attribué à M. Clec'h, peut-être.